

AN TRI MARC'HEGER
Pach Pi Treger

Disul da vintin, pa zavis, tri marc'heger a rankontris ;

Tri marc'heger akoutret mad,
Daou 'oa war varc'h, unan war droad.

**An daou war varc'h ma zremenas,'n hini war droad ma zaludas ;
'N hini war droad ma zaludas,
Ur pok pe daou me c'houlennas.**

- Kemerit daou, ha ma losket. -Ma c'halon baour 'zo gounezet ;
Ma c'halon baour 'zo gounezet
Gant eur plac'h koant 'm eus rankontret.

**Ma zad, ma mamm ho deus madoù, evit ma c'has d'ar skolajoù ;
D'ar skolajoù, da Sant-Brieg,
'Vit ober ouzhin ur beleg.**

Evit beleg me ne na vin ket ; Gwell eo ganin bezan krouget !
Gwell eo ganin bezan krouget,
Gant eur gordenn tric'hwec'h troated !

**Gwell eo ganin bezan beuzet, barzh ar mor don, tric'hwec'h gouret ;
Barzh ar mor don, tric'hwec'h gouret,
'Lec'h ma vez tapet ar pesked,**

Ha pa veint bras, a veint laket, d'ober chaous gwenn d'ar soudarded.
Noz kentan ma ofern nevez,
Peder botez dindan ma gwele,

**Peder botez dindan ar bank, ouzh ma c'hostez eur plac'hig koant ;
Ouzh ma c'hostez eur plac'hig koant,
Me boko dezhi o p'am bo c'hoant.**